

ORDINAL AN OFERENN

EN ANO AN TAD HAG AR MAB
HAG AR SPERED SANTEL. AMEN.

Tostaat a rin davet aoter Doue,

— An Doue 'zo levezet va yaouankiz.

Hor skoazell a zo en Aotrou Doue,

— En deus graet an neñv hag an douar.

Me 'gofes ouzh Doue... (gant ar beleg)

— Plijet gant Doue hollc'halloudek kaout trugarez
ouzhoc'h, pardonñ deoc'h ho pec'hejou, ha kas
ac'hanoc'h d'ar vuhez peurbadus.

Amen.

— Me 'gofes ouzh Doue (Implijet e vo an doare
kustum e pep lec'h, pe ar stumm-mañ) hollc'halloudek,
ouzh ar Werc'hez glorius Vari,
ouzh an Aotrou sant Mikael arc'hael,
ouzh an aotrou sant Yann Vadezour,
ouzh an ebestel sant Pêr ha sant Paol,
ouzh an holl Sent, hag ouzhoc'h va zad,
em eus pec'het bras, dre soñj, dre gomz ha dre ober :
Dre va faot, dre va faot, dre va brasañ faot.

Rak-se e pedan ar Werc'hez glorius Vari,
an aotrou sant Mikael arc'hael,
an aotrou sant Yann Vadezour,
an ebestel sant Pêr ha sant Paol,
an holl Sent, ha c'hwi, va zad,
da bediñ Doue evidon.

Plijet gant Doue hollec'halloudek kaout trugarez ouzhoc'h, pardonñ deoc'h ho pec'hejoù, ha kas ac'hanoc'h d'ar vuhez peurbadus.

— Amen.

Pardon hag absolvenn eus hor pec'hejoù bezet roet dimp gant Doue hollec'halloudek ha trugarezus.

— Amen.

Va Doue, distroit da reiñ dimp buhez,

— Hag ennoc'h ho pobl a gavo levenez.

Diskouezit dimp, Aotrou, ho madelezh,

— Ha roit dimp ho silvidigezh.

Aotrou Doue, selaouit va fedenn,

— Ra savo davedoc'h va galvadenn.

An Aotrou Doue ganeoc'h,

— Ha gant ho spered.

Kyrie

Aotrou Doue, ho pet truez. (3 gwech).

Aotrou Krist, ho pet truez. (3 gwech).

Aotrou Doue, ho pet truez. (3 gwech).

Gloria

Gloar da Zoue e barr an neñvoù,

— Ha peoc'h war an douar d'an dud a blij dezhañ.

Bezit meulet.

— Bezit trugarekaet.

Bezit adoret,

— Bezit enoret.

Bezit benniget evit ho kloar dispar,

— Aotrou Doue, Roue an neñv, Doue an Tad hollec'halloudek.

Aotrou, Mab unganet, Salver Jezuz :

— Aotrou ha Doue, Oan Doue, Mab an Tad.

C'hwi hag a zilam pec'hed ar bed, ho pet truez ouzhimp.

— C'hwi hag a zilam pec'hed ar bed, degemerit galv hor pedenn.

C'hwi azezet en tu dehoù d'an Tad, ho pet truez ouzhimp.

— Rak c'hwi hepken a zo santel.

C'hwi hepken eo an Aotrou.

— C'hwi hepken eo an Uhel-meurbet, Salver Jezuz, Gant ar Spered Santel e gloar Doue an Tad.

— Amen.

Kempedenn

An Aotrou Doue ganeoc'h

— Ha gant ho spered

Pedomp.

Lennadenn eus... (lizher an abostol sant Paol da gristenion...).

An Aotrou Doue ganeoc'h

— Ha gant ho spered

Pennad eus an Aviel santel hervez sant (Mazhev)

— G'oar deoc'h-c'hwi, Aotrou Krist.

Credo

Me 'gred en un Doue hepken,

— An Tad hollec'halloudek, krouer an neñv hag an douar, kement a weler ha kement na weler ket.

Hag en un Aotrou hepken, Jezuz Krist, Mab unganet da Zoue :

— Eus an Tad eo ganet, araok an holl gantvejoù, Doue eus Doue, sklerijenn eus sklerijenn, Doue gwirion eus Doue gwirion.

Ganet ha n'eo ket graet, kennatur gant an Tad, ha drezañ eo bet graet pep tra.

— Evidomp-ni an dud hag evit hor silvidigezh, eo bet diskennet eus an neñv.

Ha korf en deus kemeret dre nerzh ar Spered Santel, eus ar Werc'hez Vari, ha den eo deuet da vezañ.

— Evidomp ivez staget ouzh ar Groaz, en deus gouzañvet dindan Pons Pilat, hag er bez eo bet laketa.

D'an trede deiz eo savet a varc, da vev, hervez ar Skritur Sukr.

— Pignet d'an neñv, emañ azezet en tu dehoù d'an Tad.

Hag adarre e fevio gant gloar da varn ar re vev hag ar re varo : ha ne vo fin ebet d'e rouantelezh.

— Me gred er Spered Santel, a zo Doue hag a ro buhez, a zeu eus an Tad hag eus ar Mab.

Par d'an Tad ha d'ar Mab eo adoret hag enoret, ha komzet en deus dre ar Brofeted.

— Me gred en Iliz, a zo unan, santel, katolik hag abostolek.

Anzav a ran ez eus ur vadeziant hepken evit pardon ar pec'hejoù.

— Ha gortoz a ran adsav ar re varo da vev, ha buhez ar bed da zont. Amen.

Prefas

...a holl viskoazh da virviken. Amen.

An Aotrou Doue ganeoc'h

— Ha gant ho spered.

Ho kalon d'an uhel !

— Troet eo war-du Doue.

Lavaromp bennozh da Zoue hon Aotrou :

— Just ha santel eo.

Sanctus

Santel, santel, santel an Aotrou Doue, mestr ar bed.

Leun eo gant ho kloar an neñv hag an douar.

Hozanna e barr an neñvoù.

Benniget an hini a zeu en ano Doue.

Hozanna e barr an neñvoù.

Pater

Pedomp : Kenteliet gant gourc'hemenn hor Salver, ha desket maz omp bet gantañ da bediñ, e kredomp lavarout :

Hon Tad hag a zo en neñv, (implijet e vo an doare kustum pe ar stumm-mañ) hoc'h ano bezet santelaet ;

ho rouantelezh deuet dimp ;

ho polontez bezet graet war an douar evel en neñv.

Roit dimp hizio hor bara pemdeziek.

Pardonit dimp hor pec'hejoù

evel ma pardonomp d'ar re o deus pec'het ouzhimp, ha n'hor lezit ket da gouezhañ en tentadur,

met hon diwallit diouzh an droug.

Hon disammit, Aotrou Doue, diouzh pep droug tremenet, a-vremañ ha da-zont. Ha dre bedennoù ar Werc'hez glorius Vari, Mamm da Zoue, re an ebestel venniget Pêr ha Paol, hag Andrev, ha re an holl Sent, plijet ganeoc'h reiñ dimp ar peoc'h en hon amzer, ma vezimp bepred dre ho madelezh distag diouzh ar pec'hed ha diwallet diouzh pep trubuilh.

Dre hor Salver Jezuz Krist, ho Mab hag hon Aotrou, a vev hag a ren Doue ganeoc'h ha gant ar Spered Glan, a holl viskoazh da virviken.

— Amen.

Peoc'h hor Salver ra vo bepred ganeoc'h.

— Ha gant ho spered.

Agnus Dei

Oan Doue, a zilam pec'hed ar bed,
ho pet truez ouzhimp.

Oan Doue, a zilam pec'hed ar bed,
ho pet truez ouzhimp.

Oan Doue, a zilam pec'hed ar bed,
roit dimp ar peoc'h.

(Evit an Anaon : Oan Doue, a zilam pec'hed ar bed, roit diskuizh d'an Anaon... roit diskuizh d'an Anaon, da virviken.)

Da gomuniañ

Setu Oan Doue, an hini a zilam pec'hed ar bed.

— Va Doue, n'on ket din e teufec'h betek ennon, met lavarit ur ger hepken hag e vin pareet.

Korf hor Salver.

— Amen.

Da glozañ an Oferenn

It e peoc'h hor Salver : (Meuleudi d'hor Salver :)

— Bennozh da Zoue.

(Evit an Anaon : Peoc'h ha diskuizh d'an Anaon.

— Amen)



Doue hollc'halloudek d'ho pennigo, an Tad, ar Mab, hag ar Spered Santel.

— Amen.

SAKRAMANT AR BINIJENN

Ra vo an Aotrou Doue en ho kalon ha war ho muzelloù, ma c'hellot anzav evel maz eo dleet, hoc'h holl bec'hejoù. Amen.

Plijet gant Doue hollc'halloudek kaout trugarez ouzhoc'h, pardonñ deoc'h ho pec'hejoù, ha kas ac'hanoc'h d'ar vuhez peurbadus. Amen.

Pardon hag absolvenn eus ho pec'hejoù bezet roet deoc'h gant Doue hollc'halloudek ha trugarezus. Amen.

Plijet gant hor Salver Jezuz Krist ho tisammañ, ha me en e ano, hervez ma c'hellan ha m'hoc'h eus ezhomm, a ro deoc'h diskarg eus pep eskumunugenn ha kasiiz.

Ha bremañ e roan deoc'h an absolvenn eus hoc'h holl bec'hejoù, en ano an Tad hag ar Mab hag ar Spered Santel. Amen.

Pasion hor Salver Jezuz Krist, meritoù ar Werc'hez glorius Vari, ha re an holl Sent, kement vad a reot ha kement droug ho po da c'houzañv, ra dalvezint deoc'h da gaout pardon d'ho pec'hejoù, da greskiñ buhez ar c'hras ennoc'h ha da c'honid ar Baradoz. Amen.

In casu urgenti, pa vez mall reiñ an absolvenn :
Me 'ro deoc'h diskarg eus pep eskumunugenn ha kastiz, hag an absolvenn eus hoc'h holl bec'hejoù, en ano an Tad, hag ar Mab, hag ar Spered santel. Amen.



Concordat cum originali

Sant-Brieg, Sul Faek 1965

† Fr. Kervéadou

Eskob Sant-Brieg ha Landreger